


VODKERCH

deuet en-dro



nevci.banv




LAVARIOÙ-POBL



ETRE MA İBIL HA MA SACH
E2 EUS SAVET UN HENT PRAS
GANT LAOU - KRAPITOUS, FARAOINED
O TONED HAG O VONED
D'AR PARDON KAER DA
BARDON TOULL MA RÊR !

AR MARD
A ZO GARO
AR FOERIGELL
A ZO TANO!

TE 'ZO UR
PAOTR BIHAN
SAVE LOST
PIS A BELL
HA KACH A DOST!



GWECHALL ha Gwechall
an neb n'evoa daoulagad
ne oa ket dall
ha baenan an neb
an eus a wel euen
pe a-dreuz !

TRI DRA DIBOSUP :
- PLENAÑ BRASPARZ
- DIVEINAN BRIEG
HA DIC'HASTAÑ POULLAOUEN

FACHET ED MARI NE LAVAR GER
HA TRO HE FENN OUZH AR VOGER
MOUZED ED LANNIG HA DU E DAL
TOST AN ARNE DA
STRAKAL



MIZ MEURZH GANT E
REVEURZ
A RA DA WRAC'H KA'HAD
EN TI
HA D'HE MERC'H KOULZ
HAG HI

AR PITAOUER

GWIN PENSE

Biskoazh ne oa bet kement a lorc'h dindan kasketenn Yann Kastreg. Sofijit 'ta, kabiten d'ur vag gwin-ruz nevez flamm o toned 'maez eus chanteroù Sant Nazaer. Lakaet oa bet dezhi ano ur sant eus ar vro, Sant Gwinal, hag ober a rae etre Bourdel ha Brest.

Noziñ a rae war an 30000 litrad gwin ruz, ha kaer !noe tourtan Penmarc'h bannañ gouloù a beb tu, n'helle ket Yann Kastreg gweled e zouar ginidig : ar vro Vigoudenn. 'Na zo kaoz e krizas e dal gant ur barrad squezh pag e welas un doare gouloù ruz, dern, e-kreiz an teñvalijenn. Echu oa mare ar befiseerien, ur vag ? gouloù un ti ? Ya, gouloù un ti 'na oe sur a-walc'h. Koulskoude e oa bremañ 2,3,5, 10 gouloù. Gervel a reas an eilgabiten ha ne verzas netra. Ne oá két sod koulskoude, kemer a reas e c'hevellunedenn hag e welas gourlañchennoù, un aridennad gourlañchennoù ruz-tan, lugernus...

Hunvre ? Farsadenn ? Asaouer ? !Noe ket bet amzer d'ober e soñj, hag e klevas ar vag e raklañ ouzh ur garreg.

Ar journalioù o-deus kontet penaos eo bet savetaet ar skipailh. Med netra war ar reuz a oa e-touez ar Benmarc'hiz. Dont a rae ar gwin ruz 'maez dre flistradennou munud hag an holl a gave mantrus leuskel anezhañ d'ar pesked. Kontañ a reer e yae eeun ar c'hranked war ar bazioù bremañ. E-pad an deiz e chome ar vartoloded da sell distruj eus an torfed. Med penaos gober, re zañjerus e oa ar mor e-barzh ar c'horn-se. Ha n'eo ket ar prefed a lako pompiñ ar gwin pag eo ar c'houlz c'hoazh. Brud a redas e oa boutailhouù iveau e-barzh ar vag ha barikenoù; ar mintin war lerc'h e oa leun a dud e winrusa war an aod, en aner.

D'an trede devezh e oa degouezhet an tachad gwin tre . war ar reier. Biskoazh ne oa bet kement a dud o vrennika 'giz an deiz-se: blaz ar gwin gant ar birinig...

Ha goude-se ne zeue takenn ebed ken 'maez ar vag. Tristidigezh toud 'oe ken barzh Penmarc'h. Daou vartolod kozh en em groupgas, unan all a yeas d'ar strad o klask mont beteg ar Sant Gwinal. Ne gredan ket 'meus hunvreet.

BREUR ARTURO

!VO KET TOUD AR RE GLANV BA !N OSPITAL

....

Gouel an Unvaniezh : Gwechall e oa gwin e Ledenez Sarzhaw, bremañ n'eus nemed e bro Naoned e kaver gwin; ha peseurt gwin ! Hag-eñ e laoskfemp anezhañ da vont kuit ba! Pays de Loire ? Petra ivije evet neuze goude an oferenn-bred ? Ra vo Gouel an Unvaniezh Gouel ar Muskadig !

Gouel ar Brezhoneg : 4 devezh e Kerne Izel... soñjit !ta ! 4 devezh e bro ar chistr hag ar chouchenn. Ha Pont 'n Abad 4-5-6-7 a viz Mezheven pep tra e brezhoneg, brezhoneg lirzhin ar Vigoudenned. 4 devezh e-mesk poblañsou gwingar ar vro Vigoudenn. Hag e-giz !lar ar ganaouenn :
"Med merc'hed Kerne Izel, ar re-se zo dispar Hag an hini n'eo ket tomm, hounnezh a zo klouar"

Gouel Pobl Vreizh : Echu ar skol ! Poent 'n em lakaad da vevañ. Montroulez, lec'h en em gav kej-mej Leoniz, Tregeriz ha Kerneviz. Birvilh a vo, sur awalc'h, ha gwell-a-se ! Hag an hini ne yourro ket a vo fuzuilhet !

TCHAKATCHAKATCHAKATCHAKATCHAK

Plac'hig kenedus
korf traezh
gant da lagad gouzigor war tan
tri dric'horn da elevez
a zo va spi
ha difouperez trolineneg da hud
diazez va gwenvidigezh

c
h
a
r
a
b
a
n


Te 'zo re
domm d'ar
chouchenn
paotr!




Med Soniñ a ray
adarre ar mekanik
dañs-plinn gant ma
doare
din-me!



YOUENN TRAJOUKAOL



MMMM...



Mallozh-Toue!
Ar chouchenn lak
ar biniou beu
hag ar soner marv






Diwezhatoch

M M M?

Kalz amzer
am eus Kollet
(war un ton
anaseget)



Natre avad.
al lambig,
zo deuet
mad da
esān! Ur
blisadur!



"Ouzh soroc'hell leun a avel
Den re vrudet a zo heñvel"
(Krennlavar)

KAOC'HKEZEKADENN DIWEZHAN MONGOLIAN EUZHIC' POULDRUZIG
PE NOTENNOU DIWAR-BENN AR BIGOUDENNED KOZH GANT
AN AOTROU PIPI JAKOU HELIAS

"Le cheval d'orgueil"... Ar marc'h-orgouilh e-giz a lavare Ivon Krog, "Eostig Kerineg", oberour "Ur sac'h ad marvailhou ha "Klefived ar medalennou gant an Aotrou Fistoulig"... Sell aze chiñtradenn nevesañ Jakez Kroc'h-en, ar penn-boultous lorikennek a zo bet, evit-ar-wech, a-holl-viskoazh, ur pezh braw a douseg vil... Ha diaes e ve dichouchañ gwashoù'h mordousog evitañ e-barzh foñs ar Vretoniri, hiziw an deiz, moarvat... Ralik a-walc'h eo a-barzh-fin an drubarded deus e rañs-eñ. Ha sed ema 'l lorganaz en e yudañ, gant ar vrud a vez war e anw debaoe un nebeut mizioù. Biskoazh c'hoazh ! Pedet e vez Chakesper Allas da zont da gemer perzh... fall-put... e nouspet abadenn ha skingasadenn ken war ar skingomz, ken war ar skinwel... nes ankouaat e vez taolet pennadoù, a-vil-vern, da chostromed stank ar vro, kel lies ha bemdez-c'houlou, war ar c'helaouennoù ha'r c'hazetennou... war ar chournelioù ken-toc'h-rak, petra ober deus hevelep parichouù didalvout krenn.

Hama, n'eus deut gant "Buzore al lartijenn" (sañset "Bugale ar startijenn"... Henoñ Kusédupoulê... a larje toñtoñ Loulou, klañv gant an nemoroid) nep komzenn speredek, nep lavarenn sonn... droc'rezh deus ar c'hentañ ne lavaran ket. Gwashet ! ... Betek gouzout n'eus met ar Grall a gement en deus savet e vouezh a enep da brespolite mantrus ar "Marc'h Orgouilh", neiz-pig rukunus al loen strouilh --- gant ar vezh !!!... Tremen poent eo da'r Zitrone tew embann e fidorienn nevez : "Le Bourrin d'Auteuil"... e-giz-se e kevezo ar c'haval lardous Leoñ gant an Heleies beuls-beulke-beultu, ar marc'h-sot, ar marc'h-lacu... Trapenn "Ca marche aussi".... N'eus ken ober anw deus an urupailh diforlinket Chañ Marc'h-Gall, ouzhpenn an traou-se, hag e vo un trikon a-zoare war an dachenn, tudoù !! Siwazh dezho o-zri, ne vo gour da vont da abona war o lerc'h... Un druez, kement-se ! Setu a zo kalemarc'hif, boullc'hast :

Pelloc'h ema Pipi divalaw-mezh-e-welet e kas e aotroumobil nevez-flamm-flimmin, c'hwec'h ugent jaw dezhi, war raok dre straedou Kepac'h-Kaoc'h-an-Tin... Mechañs 'vat eo gwelllik gantañ pochañ un tammig lakez desavet a-feson, ur pachig bihan seven da c'hoari e chofer c'heuc'h... C'hwi oar, n'eo ket prestik da zruziviañ e arbelad grifou... Pinvidik-moc'h eo Moñcheu Eliaz, ur spont ! Yao, rekis eo goprañ ur mevel-karr, da vleniañ ur "gundu diabarzh gwenn-ha-du" -- A-barzh pell e vo gantañ un dekenn a sekretourez, ur vouilhez paotrez deus Lababan, koef kran hag otou berr dibikous ganti, tamm stern-bronn en-dro dezhi avat... Pegwir e ranker chom mod-kozh un disterañ memestra ! Dilesoc'h a se ne vo ken !!

Bremañ e vez ret-mat da'n nen dilasañ e voujedenn da zont da selaou, gant dudi ha didu, rafihouennerezha pawkaolerezha Bigouter pout... Pemp kant lur da nebeutañ ar wechad all e Konk Kerne -- Met, gwir eo e teu brawik e goñchennou born gantañ, hag o vezañ n'eus nemed lonkerien poulc'hed, tudachou diwezhat a-seurt gant an Divannac'h sot-magn, ha me oar-me, deus ar re gabac'h a van da souezhiñ e-barzh sal ar prezegennou...

Setu 'ta Per Beurlok savet deus cheulk ar barrez da "Animateuc'h du Troaziem Ach" e goulid an Arvorig koantik ! ar voull a zo gantañ, kia.

Ha bep tro e vez dibunet e vidенноù gantañ war ar memes ton, a vourr ar re flodac'het lip outañ... Gastoù ! Memorioù sasun ur souin bitous deus Bro Vigoudenn aet a-nebeudouigoù da voc'hoilh tonennok, eleze ur pezh mell torc'h dindan ar gouarnamant... a zo bet e gefridi pennañ fardañ deomp skolaerien frañsek penn-kil-hatroad, kitern-tor-ha-sol, ha deskedik war lizhiri kaer begenn ar Frañsizien... hep disoñjal iveau eo deut mat-kenañ da c'hlepeien skedus-bras evel an Aotrou Chalouni Boku-erer... peadra da zont da skolioù-moc'h Kemper ha Brest da gontañ kaoz diwar-bouëz al lizheradur saourus ha diantek e beurtoñ-armoc'hikeñ, na petra --

Mil gurun ! An dra-se a faot dezhañ bezañ an Drandoue nemetañ, an hini diwezhañ-holl, an test glanañ, an aspadenn nemeti... pa n'eus anezhañ tra ken met ur c'hozh penn moc'hikan... un doc'h-dac'h-doc'h-dac'h rinik-choutik, peus-luo ha toc'hor evelato --evurus deomp... boued ar boser... kilhevardon deus ar fonnaplañ ha deus ar gwellañ a vo graet gant an aneval skouarnok, e anw P.J. (na kaejet ur moc'hant, klok...) Helias, n'eus mar na marteze !

Ha konoc'hik egetañ a anavezet-hu e-barzh ar vro-mañ ??? Klaoustre n'eus den ! Ha piw ar wez ludik a zo bet chañset (dichañset... diuz deoc'h!) dezhi bout sailhet gant seurt hoc'h brimminiat ??

Ha pezh tres a zo war vin ar perc'hell inosant gaoliet diouzh ar boulom hag ar voufam ?? Ec'h ! minerges !! Doñjerus ha fastus e ve finoc'hellañ muioc'h e kraou ar moc'h... En e vraoued ema 'n ozhad'h loufres, a-dra-sur, ur c'hrog-moc'h deus an dibab, nekwir! ? E skid an tourc'h bras... Ne chomo ken met kelan linkr ar vanw dal-pet... Aes eo goût, 'm eus aon -- Gwechall-gozh e oa mat ar bed gant an dudigoù, e Pouldruzig eveljust; bremañ 'vat n'eo ket koulz ! Aet eo ar stal da stalig, eme Ber, ar paotr "war an ton" war e veno.. Gwell eo bezañ kiger evit leue... Mes... Petra da ober... E giz-se 'ma... ar rod a dro... eme "Leu Bigoudeñ boñ teñ", "Leu Moñgolieñ ki koñ prañ rieñ". Eya, ne dal ket ar boan klask cheñch penn d'ar vazh... Planedenn ar vigoudenn gaezh eo... Sede furnez Pipi laosk, an hini kreñv war ar restachoù... Un heug !! "Un hoant lansein e zou genein*"... Anat deoc'h .

LAOU PAFALEK

(Raer-moc'h diouzh e vicher)

*Notenn : e Roazhong tro an ti : Me am eus c'hoant da zisteurel...

--*-*-*-*-*-*-*-*

Eus o feiz a larer e tibradont meneziou ganti
Ken o savont beteg an neñvou
N'oulan ket
Braw e kavan-me an Are war hon douar divrall
E skoaz ar c'hredennoù

Eus o goanag touell tud hegredig
A livont gantañ an amzer da zont
A vezont trellet gantañ
N'oulan ket
Braw e kavan-me an dizesper ha galloud an anken
Rag heug ar bed-mañ

Eus o c'harantez deñved o plegañ d'an touzer
Furnez aes ha sentus, laoskent ez
N'oulan ket
Braw e kavan-me ar Gonnar Foll
An tangwall dall pulluc'her
Kement mestr ha kement kabestr
L voug c'hoazh em goug

PAJENN LENNEGEL HA SIRIUS - TRE

Klevet 'peus, me gav din, aon eus DASTUM, hor Sonskrivadeg Vroadel a Sonerezh Poblel, krouet un nebeudig bloavezhiou 'zo gant Bretoned (tud kalet 'veljust, med ijinus, fur ha kaloneg iveau). Mat-tre. Ya, poent e oa saveteini ar pezh a c'hellomp deus hon herezh sevenadurel !

Klevet 'peus iveauz, me gav din ano eus KOMZ (ma n'ho peus ket, n'eo ket gwir, rag o paouez lenn ano anezhañ emaoc'h, gaouiad touet ma 'z oc'h !... Ya, me 'oar, lenn n'eo ket klevoud, med n'em eus foutre-kaer da... Kendalc'homp kentoc'h gant hor pennad, rag lennegel ha sirius-tre eo) KOMZ, hor Sonskrivadeg Vroadel a Rannyezhou Brezhoneg, krouet nevezikoc'h 'zo gant Bretoned "Brezhoneg Yezh Vew" (tud kalet, se 'zo da weled, med paotred oberiant ha leun a itrik, ne laran ket... Nann, n'em eus resevet arc'hant ebed digant B.Y.V. !) Un dra vad 'oa, rag poent 'veze saveteiñ ar pezh a c'hellomp deus hon herezh sevenadurel !

Marteze !vad, n'ho peus ket klevet kalz a dra c'hoazh diwar-benn : BOURD, ar Sonskrivadeg Vroadel NEMETI a Fentigelloù Lous, bet krouet dec'h-da-noz gant Kamaladed Yod Kerc'h, tud kalet-ijinus-fur-oberiant-kaloneg-ha-leun-a-itrik (evel m'eo dleet !) goude ur c'horfad chouchenn meurdezus (evel de just, sakre lonkerien !). Met kendalc'homp, rag lennegel ha sirius-tre eo. BOURD a zo enni peb seurt a istoriou drol ha gadal, reou n'int ket graet evid ar vugale, SANSET. M'ho peus tro da dapoud danvez evid BOURD, n'ho peus nemed kas ho pandenn pe ho kazetenn da : "BOURD"

Yod Kerch

(Breizh - Brittany)

Ha gwelet e vezo.

Ya, poent eo saveteiñ ar pezh a c'hellomp deus hon herezh sevenadurel ken nopl ha ker braw !!

DA
DAL
DALET
DA LETERN
TERNUD
HUD
DA

EVIDAR SALAMALEG

سَيِّدُ الْمُرْسَلِينَ حَمَدٌ

AVANTUROU

ABDALLAH AR REIZHER

سَيِّدُ الْمُرْسَلِينَ (*)



سَيِّدُ الْمُرْسَلِينَ (*)
سَيِّدُ الْمُرْسَلِينَ (*)



NATÜRLICH!





Koumanantit da YOD-KERC'H : 6 niv. evid 10 lur
 da gas da KOMZ HAG ARZ BREIZHEK
 BP. 1305 - Rennes Villejean - 35016 RENNES CEDE

Gouennit niverennou Kozh : niv. 3-5-7-8 (2 lur pepini)
 niv. 6 (3 lur)

Da rakprenañ : Levrigou KOMZ HAG ARZ BREIZHEK

- BARZHAZ YOD-KERC'H (48 pajenn)
- LEVRIG KONCHENNOÙ (52 pajenn)
- AR SAGA PAGAN (Bannoù treset gant TUDU. 40 p.)

12 lur an tri

££££££££££££

Gwechall, ha n'eus ket pell zo, e oa e Karaez ur gaer a blac'h yaouank, a blije dezhi ar wazed, hag ar re nerzhusañ, eveljust, dreist pep tra, nemed an arc'hant.

Abalamour da se e kavas dezhi e oa red dimeziñ gant pin-vidikañ mondian ar c'horn, un den tremenet gantañ 50 vloaz, rag aet e oa-hi e karantez gant... e wenneien.

In noz a-raog an eured, ar plac'h yaouank a oa anezhi c'hoazh, ober he soñj mont da weled he diwezhaf kamarad c'hoaridaou, evid lidañ evel oa dleet nozvezh termen he buhez plac'h yaouank. Hemañ avad, ne oa ket o c'hortoz anezhi, ha ne oa golo-korzen ebed gantañ.

Dre forzh prederiañ e soñjas ober gant kroc'hen un anduilhenn mogedet, nevez bet prenet gantañ. Mad an traou 'ta ! Nemed... Nemed bec'h bras a voe, ha jabadao, ha sete an tamm kroc'hen da chom sac'het en ul lec'h ma ne oa ket da vezañ. Aner e voe klask e adtapoud.

Deuet nozvezh an eured, ar plac'h a ouelas forzh, evel ma tere ouzh ur werc'hez dinamm a c'houzañv beg ar gour en he c'hig. Med he gwaz a gemeras e c'hoant en ur ober pemp munut, ha dont er-maez.

Souezhet-bras e voe-eñ o kavoud war e damm ibil un dra hañval ouzh ur c'hroc'hen andouilhenn.

"Hanter-lac'het 'teus ac'hanon, eme ar wreg en ur zifronkal, ha deuet eo ganit ma zammig bihan..."

"Mariannig, eme ar gwaz, a beb seurt 'meus gwelet, gwir eo, med unan a oa skrivet OLIDA warnañ, gwech ebed c'hoazh !"

PAOTR KERNEBLEC'H

££££££££££££

Gerioù dichafrantet

o plavañ 'vel un
tropellad gwazi a-us da paludoù
trist ha louet ar goañv

Lorañs al Lokard

Diù sonenn.

"Dans le Morbihan, on ne trouve que des cantiques à Ste Anne d'Juray" Colonel BOURGEOIS ("Kanaouennoù pobl dastumet gant .. Bourgeois")

A pe oen é Sant Maleù, Sant Maleù beniget,
éh oé fintet krampoëh d'emb get ur balon dilostet.

Hag er balon a oé toull, er hrampoëh oé krazet
Chomet un tamm é men goug, tuchant vehen bet taget.

"Malac'h'tou" laré er Herneù, vo ret d'ha trohein un dreizenn
aveit lenel a men goug un hantér "grampouzenn"

M'boé mé choéjet ur vestrez é kosté SANT MALEU
Oé k'er pèh ma oé ur vraù, mès sort sé oé un tamm tra.

M'em boé choéjet un arall é kosté KIMP'RLE,
Oé merchet 'korn hé fesenn : "Vive la Liberté"

M'boé hoah choéjet un arall é kosté en Henbont,
Honnèh a oé braù erhoalh mès hé zoull oé ket ront !

A pen dan né ar er bank, me daolas me lavreg,
Rah er merhed sell-doh me revr hag e gomans de hoarhet...

"Malac'h'tou" laré er Herneù, gavan k'en toull g'er blev,
Fich ha fich ha me fichei, a dra sur, n'er havei !

Kleuet é PLEUIGNER - 1974

Tri paotr yeuank a LANDEVANT
Zo oeit de bardon en Oriant, lan la brochamb, brochamb.

Pardon en ORIANT émant bet
'Soñjal kavouit o mestrezed.

Mestrez erbet doé ket kavet
Hag én ur bordel eh oent bet.

Tri taol dohti m'em boé tennet
Er vérol vrás m'em boé tapet

D'en ospital oen bet kaset,
ha penn me lost oé bet trohet

Dré er fenestr eh oé taolet
én ur fojell é oé kouéhet

Ki er person doé éan débret
Eih dé arlerh é oé krévet

D'é interanant éh oen oeit
Ur ribot bras em boé mé groeit

En ur fojell em boé kousket
é me lavreg em boé kahet
é me lavreg em boé kahet
ha me manm dewoé hi golhet


Ha bout ha fri é toull ne revr
Té laro d'ein né men dé kaer !

Kleuet é KARNAG - 1971

KIMIAD AR PROLETER YAOUANK.

NÉUS MUI
LABOUR!

KIT
DA
SUTAL!



TRI MIL C'HASTAN DIAOUL!!!!

KÆ da glask labour
e lech all.



Iamm
ta!

Fouzer
Kélien
setu
petra
on!

keno
deoch
mignorud

echu!

ar bed a
zo
brein!



MAR D'EO RED
DIN OBER AR
c'HAST E PARIS
'Vel SE E VO
MAD?


TOK
TOK

TOK

BREIZH

Ludik

nevez-hanv , BEC'H D'AR PANELLOU- LEC'H !



DEUET EO EN-DRO AN NEVEZ AMZER

DEUET EO EN-DRO AN NOZIOU SKLAER...

(war un ton anavezet mad)

Pa guzh an heol pa sav al loar
Ur gwispon bras e-barzh ho karr

Ur gwispon bras, ur pod liw-du
Ha dilhad lor kemerit-hu

Hag en ur vont d'ar festou-noz
'C'hellfec'h harpañ war vord ur foz

Lakit liw gwenn war ar galleg
Ha gant liw du ar brezhoneg

Ma teu Bugale Mari Robin
Tec'hit kerkent, paotred mibin

Tec'hit buan war ziribin
En em skluchit 'giz ul lapin

Ra vo ganeoc'h stouet ho penn
'Vid achapiñ d'an archerien

Ha peb eil deiz adkomañset
Breizh Izel vo ganeomp livet

N'eus ken 'giz-se 'teuimp a-benn
Ar gouarnamant plego e benn.

VOD KERC'H Niverenn 9

Prize : 2 tur

800 Skouerenn

Rener : Tudu Huon

Diskleriet hervez lezenn Kentañ trimiziad 1976

Ni_xC_yP_zP_{1-x-y-z} 56577

Moulette : Atelier d'expression graphique

Club Leo Lagrange 16 rue Thiers 35000 Rennes

Penaoz ober chouchenn

dastumet e Lanrela e-kichen Merdrigna
ha troet eus ar gallo end-eeun

Marteze !peus c'hoant da c'houd ar mod d'ober chouchenn.

Setu da heul an doare deread a-walc'h d'ober anezhañ !vid 'nem lakaad mezw daou vloaz war-lerc'h, m'ho peus tra-walc'h a habasketed !vid gortoz kement-se (:pezh a vefe ur vezh memestra, chom e-giz-se hep pakañ unan !)

Pa po kavet an neiz gwenan, po ken !n em zimerdiñ evid stankañ anezhañ hep bezañ flemmet, pezh zo ur sapre afer. C'hwi ray toud !na d'ar serr-noz, ha pa vo stanket mad an neiz, c'hwi douollo un toull eveljust, just dindan trepas an neiz; goude-se e kemeroc'h ur vazhig soufr hag e vo devet anezhañ war ribl an toulli en ur c'hwezhañ kement ha ma c'helloc'h warni !vid lakaad ar voged da vont barzh.

Pa vo echu an trouz, peogwir e vo unan, po ken mont kuit ha dont en-dro ar mintin war-lerc'h gant ur vouc'hal, ha distruj an neiz. Pa vo distrujet en un doare 'peupre, e kemeroc'h toud ar pezh zo barzh, mel ha koar. Ha neuze gortezit ar chistr nevez.

Pa vo mad ar chistr nevez da evañ, c'hwi lako ar mel hag ar c'hoar en ur gaoter bras meurbet, ha dour m'vez; lakit toud !na da dommañ, kement ma vo posupl d'oc'h derc'hel ho torn 'barzh. Ha goude-se lac'hit an tan ha dastumit ar c'hoar pa vo ~~an~~ hanter-yen an traoù-se. War-lerc'h e lakoc'h pezh zo ezhomm er chistr nevez evid kaoud diw wezh muioc'h a chouchenn evid ma oa mel ha koar. Lakit da dommañ en-dro keit ma weloc'h spoum war c'horre, tennit anezhi; ha po ken lakaad ar chug-se da dremen dre un tamouez fin-fin.

Bremañ eo tost echu an traoù, ne chom ken lakaad ho chouchenn en ur varrikkenn e-pad ur bloaz, ha kement-se e boutailhadoù.

Yec'hed mad

War roch ar C'hefeleg
em eus sec'het he daelou
o vont da vruzhan
gant va fokou garo.
He c'horf gleb ha bloñset
gant ar bili fallakr
a oa dezhi ha din.

War enezenn kelleren
he deus kontet din
istor ar bugu bagoù,
kollet gantañ e skiant,
a gane d'ar brini
hag a c'halve an houdi.

War enezig ar Begeg
he deus lakaet he dilhad
da sec'hiñ,
ar skourrigou mistr ha dibaoù
dam-wisket ma oant
ne spontent den ebet.

War ar youch veur
em eus he c'haret-hi
hag he daoulagad beurleg,
gant e. Jeizh o vleuniou em boutou,
ar c'hemener em biz-troad Kleiz
hag ur skantenn staen em c'horzaïlhenn.

E ker Radennek
em eus he eureudet
ha ne oa test ebet d'hon torfed.

Sizhun ar briedelezh a
dremenjomp o klask begou-bran
war kerreg aod ar C'horz

Mervel a rejomp gant an naon.



AN DIGAOC'HER



LUDIK

76